

HISTOR ADMIRABL

DEMEUS

AR BOU DE DEO

Pehini, abaoue maro hor Zalver, ne ra nemet bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalanour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa vao o vont d'ar maro a falzevas dezan disquiza var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.

Var ton : **Guerz Santez Anna.**

Asistantet enorabl, tostaît da glèvet
Ar vuez pitoyapl a voe biscoas ar bed ;
An histor zo trueuzus demeus ar Boudedeo.
A zo nôs-deiz o vale aboe hor Zalve maro.

Eus a tribu Nephtali, a guêr Jerusalem.
Voa ganet Absarius, carguet a anathem ;
Dont a ras ar bed-ma en amzer Herodes,
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verch'ez

Va zad a voa ur c'halve, va mam keme nerez,
Hac a laboure en Templ da ober broderez ;
Ha va c'herent am desqas da leun leor al lezen,
Hac hini ar Brofetet iveau a dra certen.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,
Da eur vreg fur a prudant a tribu Benjamin,
A binim' boe tri buguel en amzer ma teuas
Autrou Sant Yan Badezour d'annonç ar Messias.

Sant Yan a gounertissas calz eus ar bayonet
Pere vos idolatret, caledet er pec'het :
Dec mil den en eun devez en deveus badeet,
Me, va greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried emezi,
Lekomb en em vadezi, enont è ar Messi ;
Ha me o respont dezi gent un ear direspet :
Na ni naç hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibennet
Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbet,
Ha ma teuas hor Zalver evit rên en e blaç ;
Hac a ras dre ar c'han ton calza viraclou bras.

Clévet e meus bet Jesus alies o sermon,
Hep ne meus bet profitet eus e bredisication ;
Va-unan e voa pressant p'en doa rassaziet
Dec mil den gant bemb bara ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas souden
Jésus o ressuscita Lazar, breur Madalen,
Ha güelet dibosseid calz a dud possedet,
Ha sivoas din pec'her bras, ne meus tam profitet.

Aben eun nebeut goude voe Jesus kemeret
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zougouen
Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,
Da vont da venet Calvar de vea crucifet :
O velet an dud o redet, me guemer va buguel,
Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,
Pehini en tal va stal a deu da reposi,
Ha me lavarat dean gant eur gomz arrogant
Qè alesse eus va stal, te zo eun den mechant.

Ganes on dizenoret gant da iffronteri.
Pa quélân o reposi aman e tal va zi ;
Querz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguet,
Querz alesse d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas din gant eur voez trueuzus :
Mont a ran da hantia, den fall, den maleürus,
Me reposo gant va Zad, te valeo bepret
Dre bêvar c'horn ar bed-ma ac'han da fin ar bed.

Ia, te veleo, ac'han d'ar jujamant,
Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramaant
O varni ar bec'herien pere voa condaonet
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaütet.

Pa glèvis comzou Jesus, va c'halon voa touchet,
Ha me réi vo bugale eun istant d'am pried,
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus.
Ha chom en he mouchouer e boltret trueuzus.

He ellout n'em arréti e heuillis hor Zaluer.
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santez :
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguet.

P'am boe guelet hor Zalver o verval var ar groas
E creiz etre an daou laer c'arguet a boanniou bras,
Ha me commanda va beach gant calz eus a angen,
O tout da laret adieu da guer Jeausalem.

Sonjitz eta, Bretonnet, pugement a c'hlaç'har
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar !
Rancoult giuttat e gartier, e vreg, e vulgale,
Hep qimadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nomb a vlaveziou,
Ec' éruas en Egypt, pel bras demeus a vrô,
Eno e mâ ar Mor-Rus, elec'h m'oee tremenot
Moyses gant pobl Doue, hep cavout drouc ebet.

Mont a ris eus ac'hane da enezen Candi,
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni :
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou
E verc'hez evit sacrifici da rei d'o doueou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,
Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;
Pedi reont Doue da gaout prosperite,
Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc dêze.

Guelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel,
Aini'devas da laza, sivaas, e daou buguel.
Er vro-ze è permettet laza ar bugale.
Pa n'o deus quet a vara da rei dêze.

Goude'qemeris an hent da vont d'an Enezi,
D'an Americ, d'an Asi, ha neuze d'an Turqi
Ar graguez eus var vrô-se a vale d'an arme,
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vulgale.

Eno emedi ar c'his da laza ar botret,
Nemet unan dre famill ne ve james miret.
Be'o deus eur rouanez a ro commandamant
Da laza an oll botret, hep cahout de nep damant.

Er guer-eus a Garniol eus sur c'his drol meurbet
Rac Eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet,
E rancoult ar vreg ynuouanc, nos quenta e heured,
Mont da gousquet gant ar princ, vit bea enoret.

Bet on ebars eur c'hood hanvet Cisaria,
Elec'h ma eller bale cant leo d'an neubeata
Hep cavel dour da eva, na feunteun, na rivier,
Ar pez zo goaal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a pis c'hoas pelloch, d'ar guer a Vosopa
Pini zo eus he diavo eur prinç eus an drola :
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,
Ha n'en deus gen sourdader evit difen e vrô.

Ac'hane'yis da eur guer zo hanvet Estopet,
Elec'h ma zeus serpantet ha loene vil meurbet
Zo quer teo ha corf un den sur ma vent muzuret
O deveus d'an neubeata daou-ugent troated het

Et spaç demeus a gant vloas ez on bet o vale,
Ha me erouot adare em bro hac em c'ontre ;
Allas ! maro voa va greg coulz ha va bugale,
Ha den ebet eus va bro certen n'am anavee.

Neuze e teuis de Rom, ebars en Itali,
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlaç'har enni ;
Guelet'ris marzeria nombr bras a gristenien,
En defot ne renoncent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale ar mor coulz ha var an douar,
Ha me partiel neuze evit ar Frañc, bro rar ?
E Marsel, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon
Arch'ane da Vreiz-Izel, d'ar guer vrao a Roazon.

Guelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hood
Ha guelet Brest ha Qemper ebars en douar prat
Ha guelet ar ger a Is en e frosperite,
Hac ar ger a Lexovi a meus guelet iwe.

Guelet e meus Breiz-Izel en coad ha meneziou,
Ma zoat evel sovajet neuze ebars er vro ;
Me a vel calz a guerriou er vro-se batisset,
A ra calz a chencharmant abaoe ma zon bet.

Me vel ar guer a Roazon eur guer gaer batisset
Dol, Guenet a San Malo, Dinan hac an Naonet,
Sant-Brieuc ha Landreguer, Lannion, Montroulez,
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ivez.

Ar c'hariou ze meus guelet e coad hac e prajou
Pa deus d'ober va veach qenta ebars er vro ;
Cetu batisset Qemper, ha Brest ha Recouvranc,
Qemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc.

Anfin, ra on condaonet gant Doue da vale,
Me zo bet en em gavet e creiz meur a arme ;
Canoliou a fusiliou, clezezou, sabrennou,
Netra ne debet capabli de rei din ar maro.

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,
Hac an dud a voa enne a meus guelet beuzet,
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet
Comzou Doue a ranco bea accomplisset.

Condaonet e zan ganta da chom var an douar ;
Comprent oll christien, ema zo din glac'har !
Va tourmanchou er bed-ma biqen na echuo
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennec so em godel bepret
James ganet nep seurt clenvet me ne don attaquet
Bet on ebars en broyou elec'h m'oar vocen.
Hep na zeus staguet ouzin na clenvet nac anquen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,
Dre bermission Doue a meus bet offancez ;
Peder guec'h a meus redet pevar horn ar bed-ma,
Ha guelet e meus iwe calz chencharmant enna.

Brema e zon commandant da redect a bempaf,
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousset ;
Guelet a meus bet broyou zo bett oll revinet
Ha calz demeus a guerou gan ar gurun devet.

Ne meus quet calz amzer evit chom da barlant
Me a gred e ma va zreid vorgore glaou ardant,
Nan, ne zeus nemet Doue a efe discleria
Ar boanniou bras a souffran querent ma reposan.

Pebe maleur e din-me bea bet rebutet
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bet
Pa voa o vont d'ar maro, da zont da zispriza
Ha me neuze dre valeur a zeugas d'e zispriza.

Ema e ar maleur bras a meus var ar bet-ma !
Emon atao o vale ouspen trivarc'h oant vla,
Ha c'hoas e rangan bale ac'hen da fin ar bed :
Hedit Doue evidon, ma zin d'ar joaüstet.

FIN.